



SKOL-HAÑV PROGRAMMOÙ AR RUMMADOÙ

*Kan b'an dañs
Sizhun 1 - 2025*

Gant Sofi an Huñseg ha Gi Peñseg

Da gentañ, dibabet vez ar sonennoù get ar gasourion. Penaos ? Sonennoù aes da zeskiñ, da zistrip, da gas an dañs.

AR PROGRAMM :

Teknikoù kan : penaos kas ar son er-maez en un doare efedus hep kavet droug d'ar c'herdenn ha kreñv a-walc'h evit kaniñ en dañs.

Peurlipat an doare da zañsal, emen vez pouezet evit roiñ lusk d'ar c'han.

Deskiñ an testennoù tamm ha tamm.

Soniñ pe kaniñ en ur zañsal : kan lusket, bouezh kreñv, plijadur da soniñ ha da lakat ar re rall da zañsal.

Da gentañ, kaset get kasourion ar staj, tamm ha tamm get ar stajidi.

Pleustret da noz en davarn evit ar re faota dezhe.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù e-giz hemañ ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

